

434

An douz hac an avel, en ur seurt tintamar,
 A ra crena betec e calon an douar,
 Var ar mör, al lestri, tolet ha distolet,
 A string var ar riblou corfou martolodet.
 Ar bed so menacet da zistrei d'ar c'haos,
 Hac a seblant mesqa hac an deiz hac an nös.
 Peur e velimp ar c'halm en hor bro beour o rën,
 Hac ar bonneur etouez an oll bobl christenien!
 O Tempest spouronus! arrêtit ho fulor....
 O va brö! ô natur! ô theatre a horror!....
 O Doue! chadennit an tourmantchou dirol,
 Ha roit, ni ho ped, ar c'halm bremañ deomp oll.

(305)

A. L. M. Lédan.

(Vol. IV, p. 303-305.)

Aventissamant
 Da veza scifet ha staguet en eur sacristiri.

Mar oc'h eus c'hoant da goseal,
 Hastit buan mont en plas all;
 Nemet beza ve necesser,
 Ama james na gauzeer;
 Hac a voez izel a larfet
 Ar peyz ho po da lavaret.

Le Quellec, Person Plouguiel.

(Vol. IV, p. 305, suite.)